



Sant Erwan etre ar paour hag ar pinvidig.

Cliché J. SAVINA

Bleun-Brug

Niv. 45

GENVER 1952

EUS AN EIL BLOAZ D'EGILE



Ha paet eo ganeoc'h ho koumanant 1952 ?

An darn vrasa eus hon lennerien a zo echu o c'houmanant gant ar miz-mañ. O fedi start a reomp eta da baea o c'houmanant nevez raktal, pe da lavaret d'eomp ne gemerint mui ar gelaouenn.

Koumanant bloaz : 500 lur.

Koumanant a enor : 600 lur.

Kas an arc'hant da : V. SEITE, Bleun-Brug, Treboul (Finistère).
C.C.P. 544.22 Nantes, hag ar skridou da : M. l'abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan (Finistère).

TAOLENN

Eus an eil bloaz d'égile, gant L. Bleunven	1
Gourc'hemennou a vloavez mat	2
Sant Erwan ar garantez, gant V. Seite	3
Ar Bleun-Brug e 1952	7
Kenstrivadegou ar Bleun-Brug	8
Korn ar liziri	15
Dre Vreiz ha dre ar Bed	16

Lennit er miz a zeu :

Stag e groc'hen ouz e gein, gant PETROMIK.

Katellig, Mari-Jan ha Cheunig, kontadenn farsus kenañ, kenta priz Bleun-Brug Keranna, gant M. Laurent ha M. Perez eus Plougastel.

Kornadoned sant Kadou, pezh c'hoari farsus gant Y.V. Perrot hag H. Caouissin.

Kanaouennou kaer evit ar re yaouank - C'hoariou-divinadennoù.

Niverenn special. Peadra enni da sevel beilhadegou plijus tre. Goulennit diganeomp meur a niverenn.

A -BENN ma tigouezo an niverenn-mañ ganeoc'h ar bloaz koz a vezo aet, abaoe pell zo, e skouarn ar c'had.

Ma taolomp eur zellig warnañ, n'eo nemet evit gwelet skleroc'h an hent dirazomp hag evit muzula gwelloc'h al labour a jom da ober.

Ar bloaz 1951, bet eo, evit an dud a youl vat, eur bloavez puilh a c'hra-sou. Bloaz ar Jubile, bet eo, evidomp holl, bloaz ar pardon, bloaz an distro ouz Doue. War dachenn hor skoliou kristen, en devezo graet d'eomp ober eur c'hammed warzu ar justiz hag al lealded a vennomp kaout. Evit kement-se hag evit ar peoc'h, bet miret d'eomp, ra vezo benniget !

Petro eo bet ar bloaz koz evit Breiz hag ar brezoneg ? Amañ ive meur a nevezenti pouezus ha frealzus a zo deuet d'eomp.

Kevredigeziou ha kazetennou nevez a zo bet savet evit skora ha kreski hor peadra breizek. Gouelioù ha pardonioù niverus o deus lakaet gened hor Breiz ha pinvidigez he feiz da skedi dre ar vro a-bez. En o zouez, gouelioù Bleun-Brug Santez-Anna-Wened, ha re an Tad Maner, e Kemper hag e Plevin, o deus taolet ar muia lufr.

A-hent-all, eo bet ive eul laouenidigez evidomp gwelet ar gouarnamant o plega da c'houlennou hor mignoned hag o rei aotre pelloc'h e ve desket ar brezoneg e skoliou Breiz. Gouzout a reomp eo c'hoaz gwall doull al lezenn ha n'eo ket ganti e vezo savet ar brezoneg. Met kement-se atao paket eo, da c'hortoz gwelloc'h...

Evit hor c'helaouenn « Bleun-Brug », ret eo hen anzav, n'eo ket aet an traou ganeomp kerkoulz ha m'hon doa c'hoantet. Diçsamanchou a zo deuet d'eomp eus meur a du. Chomet omp berr evit degas er-mêz ar gelaouenn ar miz hor boa prometet. Klasket hor beus, da vihana, digoll hol lennerien gant niverennou dudioc'h, evel hini Santez-Anna hag hini an Tad Maner. Kalz gwelloc'h hor befe karet ober.

N'eus ket deuet d'eomp a-walc'h a lennerien nevez ha, gwas a vez a zo, e-touez ar re goz, ez eus kalz hag a zo fall-ki da baea. Meur a hini zoken, goude beza digemeret ar gelaouenn, epad ar bloaz, o deus nac'het paea d'eomp o c'houmanant, ar pezh n'eo na brao nag onest. Pa lavarin d'eoc'h eo bet kresket priz ar paper, eus an hanter, e kreiz ar bloaz, e vezo aes d'eoc'h kompren n'emañ ket an aour ganeomp o ruilh war ar raden.

Gellet hor beus, koulskoude, gwalc'h an eil dorn gant egile hag a gement-se omp aniaoudek bras d'hor mignoned vat n'o deus ket marc'hatet d'eomp o skoazell...

En eur drei hon daoulagad war-zu ar bloaz nevez, kenta tra a fell d'eomp ober eo reketi d'hol lennerien ha d'hor mignoned eur *bloavez mat ha laouen* plijet gant Doue pellaat diouto pep enkreiz ha pep dienez, miret e beoc'h en o eneo hag entana en o c'halonou gwir garantez evit Breiz.

Pa garer eun dra bennak e vezer prest da baea ker evit he c'haout.

War ho karantez evit Breiz eo e kontomp, muioc'h eget biskoaz, evit chom feal d'eomp.

Rak evit padout, evit kenderc'hel da veva, e rankomp, siouaz, kreski adarre priz ar c'houmanantchou. Glac'haret a-walc'h omp ouz hen ober, met ne c'hoarvez ganeomp nemet ar pez a c'hoarvez gant ar c'helaouennou all... ar c'helaouennou gallek. « Bleun-Brug » a vez lennet dreist pep tra evit ar brezoneg a zo enni. Ne vo ket eta, er bloa mañ nemet niverennou brezonek. Ar pennadoù e galleg a zo muioc'h o flas er c'helaouennou gallek a gaver stank e Breiz.

An darn vuia ac'hanoc'h o deus o c'houmanant 1952 da baea er miz-mañ. Arabat d'ezo gortoz e ve kaset urcher d'ezo.

Ouspenn paea ar c'houmanant, ret e vefe klask d'eomp lennerien nevez. Ma karfe hor mignoned hor befe daou vil lenner warc'hoaz.

Piou n'eo ket gouest da gaout d'eomp eul lenner nevez, da vihana ?

Ac'hanta, bec'h d'al labour ! Hor c'helaouenn a vevo dre ma fell d'eomp e vevje.

Kenlabourerien nevez a zo lemmet ganto o fluenn vrezonek evit displega d'eomp kontadennoù kaer ha pennadoù dudius...

Ra blijjo gant Sant Erwan, mellezour ar vuhez vrezek penn da benn, douger banniel Breiz « Signifer Britanniae » ar Zant bras a vezo enoret, er bloa-mañ e gouelioù Bleun-Brug Landreger, hon hentcha hag hon harpa war hent ar Wirionez.

L. Bleunven.



Gourc'hemennou a vloavez mat

E-TOUEZ ar bern liziri deuet d'eomp da geñver ar bloaz nevez hon eus bet an enor hag ar blijadur da reseo al lizer-mañ digant an Aotrou *Kardincl Roques, arc'heskob Roazon* :

« Le Cardinal Roques, Archevêque de Rennes, remercie le Bleun-Brug des vœux qu'il lui a adressés à l'occasion du nouvel an, et souhaite plein succès à cette Association qui, en vue de restaurer la Bretagne chrétienne, fait œuvre de culture et d'art sous le signe de la Croix Celtique. Il vous envoie par chèque postal une offrande au titre de membre bienfaiteur de l'Association.

† Cl. ROQUES. »

Mil bennoz Doue d'ar re holl o deus bet ar vadelez da gas d'eomp o reketou a vloavez mat. O fedi a reomp d'hon digarezi ma n'hellomp ket respont da bep hini dre lizer. Ra gavint amañ hor gwella gourc'hemennou evit ar bloaz nevez : Bloavez mat da holl izili ha Mignoned ar Bleun-Brug ; bloavez mat d'hor madoberourien ; bloavez mat d'hor c'henlabourerien ; bloavez mat d'ar « Bleun-Brug » ha bloavez mat da Vreiz.



Cliché Olale

SANT ERWAN AR GARANTEZ

AR brasa gourc'hemenn ? setu hen amañ ene hor Salver ;

« Karout Doue a ri a greiz kalon gant da ene a-bez ha gant da holl nerz hag an eil gourc'hemenn a zo heñvel ouz ar c'henta : karout a ri da nesa evidout da unañ. »

Karout Doue karout an nesa, setu al lezenn en he fez.

« Eur werennad dour roet d'ar paour-em ano d'in, eme c'hoaz hor Salver, ne chomo ket hep beza digollet en Neñv. »

Ar pinvidik fall a zo bet daonet n'eo ket en abeg d'e binvidigez met abalamour m'en deus nac'het terri e naon d'ar paourkêz Lazar, en eur rei d'ezañ ar bruzunou bara a goueze diwar e daol.

« Va bugaligoù, eme Jezuz en nozvez araok mervel, rei a ran d'eoc'h eur gourc'hemenn nevez : En em garit an eil egile, evel m'am eus ho karet. »

Deiz ar warn ziweza e lavaro ar Barner bras d'ar re salvet : « Deuit tud benniget gant va zad, da gemerout perz er rouantelez a zo bet savet evidoc'h abaoe ar penn kenta eus ar bed. Rak, naon am eus bet hag hoc'h eus roet d'in

da zibri, sec'het am eus bet hag hoc'h eus roet d'in da eva, en noaz edon hag hoc'h eus va gwisket. »

— Peur, eme ar re salvet, hon eus-ni roet d'eoc'h da zibri, da eva ? Peur hon eus-ni ho kwisket ?

— Bewech m'hoc'h eus graet kemend-all d'an diweza eus va diskibien hoc'h eus roet d'in da zibri, da eva, hag hoc'h eus va gwisket. »

Goude ar c'homzou-se, Sant Aogustin a c'helle lavaret : « Karit, Karit, ha goude grit ar pezh a garit. »

Ha Sant Paol : « Hag em bije an holl donezonou, ma n'em eus ket a garantez, n'em eus netra. »

Lezenn ar garantez : lezenn veur hon religion gristen : *karantez Doue, karantez an nesa.*

Piou en deus muioc'h komprenet al lezenn-se eget sant Erwan a Landreger ?

Nag eo c'houek evidomp Bretoned, en amzer digar a vevomp, gwelout atao o skedi dirazomp drem gaer Sant Erwan ar garantez. Emañ-hen bepred etre ar paour hag ar pinvidik, met troet e zaoulagad, e zivrec'h hag e galon warzu ar paour dibourvez a bep tra.

Kentelius ha frouezus e vo d'eomp, mar karit prederia war e skoueriou dispar a garantez strewet ken stank eus e gavell badeziant d'e gavell bez.

Ganet e Kervarzin er bloavezh 1253, e parrez ar Miniehy e Kichenig Landreger, a-vec'h digor e spered da draou ar bed, e klev e vamm o lavarout d'ezañ : « Va mab beva a ranki e doare ma vezi eur Sant eun deiz ». Hag ar bugel en deus lavaret « Ya ».

Ar vamm-se eo he deus sanket doun en e galon hag en e ene karantez Doue ha karantez an nesa, diou garantez ken skoulmet an eil ouz eben ma ne reont nemet unan.

N'eo nemet paotrig dister hag e ra dija ketekiz d'e vignoned : kaer eo terri e naon da gorf an nesa kaeroc'h eo rei d'e ene bara ar wirionez.

« Noan em boa hag hoc'h eus roet d'in da zibri. »

Erwan a ra eus e di eun ospital evit ar beorien. Ken bras eo o niver ma renk kreski e di : o reseo a ra ouz e daol e unañ. O servicha a ra, heñ e unan, rei a ra d'ezo bara da zibri, gwin da eva hag eur gwele da gousket.

E vignon Herri Fichet a lavar d'eomp e lojas eun nozvez m'edo-heñ e Kervarzin, betek naontek paour. Antronoz e lavaras an ofereñ evito, hag araog ma 'z ejont kuit, e roas d'ezo bep a skudellad bleud, pa n'en doa mui a vara.

Eun abardaevez e 1292 e tigemeraz eur familh en he fezh : Rivallon e wreg hag he fevar bugel. Derc'hel a reas anezo gantañ en e servij betek e varo.

Mont a reas eun deiz betek gwerza e varc'h evit gallout prena bara d'ar beorien a veze war e dro. Eur wech all, e vantell eo a werzas evit ar memes tra.

Eun dervez, eme Erwan Suet, e vignon, edo o nevez rei d'ar re baour eur fornad vara en he fezh, pa erruas diwarlerc'h eur paour all truilhek hag heugus da welet. Pa n'oa mui netra ebet, Sant Erwan a reas d'ezañ azeza en e gichen ha rei d'ezañ ar skudellad voued en doa dalc'het evitañ e unan. Ar paourkaez, goude beza graet an neuz da zibri, a savas diouz taol ; Erruet e-kichen an nor e tistroas werzu ar sant en eur lavarout : « Kenavo : Doue ra vo ganeoc'h ». Kerkent, ar paour-se, ken truilhek ha ken heugus, a deuas da veza ken kaer ha ken skedus ma voe sklerijennet an ti a-bez.

Sant Erwan ne fellas mui d'ezañ debri ouz an daol-se. A-hed an deiz e skuilhas daerou puilh, hag e lavare : « A ! emezañ gwelet skiñ a ran, kannad hor Salver eo a zo bet ouz va gwelet ».

« En noaz edon, hag hoc'h eus va gwisket. »

Sant Erwan, bep an amzer, a brene er Roc'h pe e Lannuon, danvez da ober dilhad d'ar re baour.

Yann a Bestivien, a welas anezañ, deiz marehad ar Roc'h, o prena c'houec'h pe seiz pezh mezer groz. Dathovada, gwreg Rivallon, a rae ganto, goudeze, dilhad a veze roet gant Erwan d'ar beorien a dremene. Ha pa ne deue ket ar beorien betek e di, ez ae d'o c'hask. Eun deiz e voe kaset d'ezañ daou baour hag e wiskas anezo penn-kil-ha-troad.

E zillhad e-unan eo a roe alies end eñ. Eun deiz gwener, en eur zont eus ar Roc'h el lec'h m'oa bet o prezeg, e kavas war e hent eur paour hanter-noaz, ha skornet gant ar riou.

« Deuit d'am zi, eme Erwan, hag e roin bara d'eoc'h. »

— Allas ! eme ar paour, neket bara eo em eus ezom, met dilhad tomm.

— Gortoz, eme ar Sant.

Mont a reas en eun ti. Diwiska e soudanenn wenn, hag he rei d'ar paourkeez. Eun tamm truilhou a daolas war e gein e-unan, ha mat pell'zo.

Da lun ar Pantekost, er bloaz 1300, Erwan a rae e Dro-Breiz en enor d'ar seiz sant. Diou vaouez a Lanveur a zigouezas gantañ etre Landreger ha Lannuon. Lore'h a oa enno, rak anaout a raent ar sant ; mont a rejont d'e heul entanet gant e gomzou santel.

A-zioc'h eun doenn blouz, war lez an hent, e kavont eur paour hanter-noaz, o c'houlenn an aluzen.

« Kemer va mantell, eme Erwan. N'em eus tra all ebet da rei d'it. »

Hag e roas e vantell d'ar paour.

Kendalc'h a reas gant e hent, ar merc'hed atao ouz e heul. Met, o burzud ! a greiz-holl e welont war gein ar sant, ar vantell edo o nevez rei d'ar c'hasker-bara.

Erwan a gouezas d'an daoulin e-kreiz an hent, hag a lavaras :

« Bennoz d'eoc'h, aotrou Jezuz-Krist, evit ho tonezon », hag e skoe war e galon evit goulenn pardon.

An diou vaouez o welet kemend-all, a leñvas gant levez. Ar sant, avât, a yeas kuit diouto en eur lavaret :

« It gant hoc'h hent gant bennoz Doue ; grit vad ha Doue ho tigolio. »

Roet en deus lojeiz d'e nesa, graet wardro ar re glanv ha sebeliet ar re varo.

Herri Fichet a lavar d'eomp e welas anezañ, eun nozvez, o loja en e di, betek naontek paour. Tan a veze en e di, e-doug ar goañv, n'eo ket evitañ, rak ne veze gwelet morse o tomm a izili sklaset, met evit ar beorien a dremene.

Prena koad a rae evit se. Hen e-unan eo a c'houeze an tan. Dougen a rae zoken war bouez e zivrec'h, ar re n'hellent ket bale, betek an oaled tomm. Aotre a roe d'an neb a gare, da droc'ha lann en e barkeier evit ober tan en o zi :

« Kemerit lann, emezañ, kement ha m'hoc'h eus ezom. Met arabat kemeret muioc'h. Ret eo soñjal er re all ».



Bez Sant Erwan.

Cliché Olole

Kenstrivadegou ar Bleun-Brug evit 1952

A MAN da heul e vo kavet an danvez evit kenstrivadegou ar Bleun-Brug evit 1952. Bez e vo gallet kenstriva (konkouri) e *Pont-e-Kroaz*, e *Plougerne*, e *Baod*, pe *Landreger*.

Ar re genta e *Pont-e-Kroaz*, e *Plougerne* pe e *Baod* a vo paet d'ezo o beaj evit mont da *Landreger*. Eno eo e vezo roet ar prizou ; ar priziou-se, er bloaz-mañ, a vo skeudennou (statuioù) eus sant Erwan (Ivon).

Goulenn a reomp start digant mignoned ar Bleun-Brug, ar vistri-skol, lakaat o bugale da gemer perz e kenstrivadegou ar Bleun-Brug. N'eus netra gwelloc'h evit o lakaat da garout ar brezoneg ha d'en em staga ouz Breiz. Pet ha pet ac'hanomp-ni a zo bet gounezet gwechall d'ar brezoneg ha da Vreiz, dre genstrivadegou ar Bleun-Brug.

Labourat evit kenstrivadegou ar Bleun-Brug a zo labourat en eun doare efedus, evit Breiz hag ar brezoneg.

I. - KENSTRIVADEG AL LENN BREZONEG

Ar c'honkour-mañ a zo digor d'an holl vugale skol eus 7 vloaz da 15 vloaz. Renket e vezint e tri rummad : *ar re vihan* (6, 7 hag 8 vloaz) ; *ar re grenn* (9, 10 hag 11) ; *ar re vras* (12, 13, 14, 15). Ar renkader-se a vo heuliet evit an holl genstrivadegou. Eur priz kenta a vo evit pep rummad.

Ar vugale a zigaso ganto al levr a servich d'ezo da zeski lenn brezoneg er skol m'emaint. Ma ne zeu levr ebet ganto e vezint laketa da lenn : ar re

vihan e « *Le Breton par l'image* » hag ar re vras e « *Ma zeski brezoneg* » pe e « *Yez hon Tadou* ». Al levrioù-se a zo e gwerz e skol Sant-Yann, Treboul.

Bez e c'heller konkouri en eun dra hepken (lenn), pe e meur a dra (lenn, displega, kana).

II. - KENSTRIVADEG AN DISPLEGEREZ

(CONCOURS DE RÉCITATION)

Kerent ha mistri-skol, lakit ho pugale da zeski unan pe unan eus ar rimadelloù a zo amañ warlerc'h ha grit d'ezo mont d'o displega d'ar *Bleun-Brug*, da *Plougerne*, da *Bont-e-Kroaz*, pe da *Landreger*. Priziou kaer a zo da c'hounit.

Pep rimadell a vo displeget en eun doare beo (récitation mimée).

A) — Bugale 6, 7 hag 8 vloaz.

Erwanig al Laboused

E buhez sant Erwan
Eun istor gaer a lennan
evidoc'h.
Selaout, me ho ped.

Erwanig,
C'hoaz bihanig,
A vezet karget alies,
N'eo ket diès,
Da ziwall ar parkou ed
Diouz ar pichoned.

Eun deiz,
Douget gant e feiz,
E chomas d'ober katekiz

D'e vignoned,
'Vel ar beleg en iliz.
Met e-keit-se a vagad,
Laboused 'e'helle skrabat...
N'eo ket :

Da ziwall an ed
Eun el a deuas d'ar red,
Ha gant eur wialenn
E kas kuit ar skraberien !

An ed eta 'voe diwallet,
Erwanig ne voe ket gourdrouzet ;
An Aotrou Doue ra vo meulet !

Renket gant L. B.

B) — Bugale 9, 10 hag 11 vloaz.

Kalon Sant Erwan

Yen ha teñval an noz, a-builh e kouez an erc'h...
Hogen war al lanneg, eur gwaz hag eur vaouez,
A vale dilavar

Dindan samm o glac'har.
Ouz an erc'h, an avel, e stourmont hep paouez,
Gant tri vugelig paour o leñva war o lerc'h.

Met setu ma kredont, e skeuden al luc'hed
Gwelout eur maner koz du-hont e penn an hent..

Hag ez eont dilavar
Dindan samm o glac'har,
Betek dor ar maner, hed al lanneg divent,
Da c'houlenn digemer e kornig eun oaled.

«Tremenit, tudou fall, prennet em eus va dor!»
A respont eur mevel en eur c'hervel ar c'hi...
Hag ez eont dilavar
Dindan samm o glac'har
Hep gouzout e pelec'h e kavint eur goudor...
Pegwir er Minic'hi e chom klozet an ti...

Yen ha teñval an noz, didrouz e kouez an erc'h...
Hogen, eur vouez o galv, eur vouez flour ha seder :
«Tostait holl hap aon
Ha debrit diouz ho naon.
Deuit, va bugale, deuit va breur, va merc'h,
Lezit samm ho klac'har ha bezit dibreder».

Tom eo d'ezo bremañ, eur goan vat o deus bet,
Ha gwele da c'hourvez... Ar mestr diouz ar mintin
Pa deuont gant trugar
Da glask samm o glac'har,
A lavaras : «Chomit!»... Ha dek vloaz int chomet
A kichen sant Erwan,... e maner Kervarzin.

Saig ar Gô.

K) — Bugale 12, 13, 14 ha 15 vloaz.

Penaos ez eas Sant Erwan d'ar Baradoz

Sant Erwan a Landreger
Alvokad ha Barner
Eun deiz ivez a varvas
Allas !

Kerkent e savas
Laouen ha seder
War-du ar Baradoz
Da c'houlenn gant Per goz
Eun tamm digor
D'e zor.

Erwan Helouri, ar barner,
War an douar,
C'houi 'oar,
Zo bet gwella den e amzer.

Rak-se 'ta, moarvat,
En devoa chans yat
Da gaout digemer
Digant Per ar Porzier.

Siouaz ! Sant Per 'oa gwall imoret
Ha gant re labour oa dirollet.
Met Erwan, dre finesaou,
Hep gouzout da Ber,
Prim, ha diwar herr,
A lammas dreist an treuzou
En Neñvou.

Ha setu laouen e ene,
Ha lorc'h ennañ ken a reude,
O veza c'hoariet eun tamm tro-gamm
D'ar porzier fri-kamm.

Warlerc'h e labour, bemdez diouz an noz,
Sant Per, a-vikoaz,
A zo bet boaz
D'ober eun tammig tro dre ar Baradoz.
Koueza 'reas war Erwan
Hep anaout anezan.

— Piou out-te, va den ker ?
Eme d'ezañ sant Per.
— Erwan Helouri eo va ano mat,
Barner a Landreger hag ivez alvokad.
— Barner ? Barner ?...

(Abaoe barnedigez Jezuz,
Per ouz pep barner
En doa eun droug spontus.)
Barner ? Barner ?... Met ! Met !
Dre va dor-mañ, biskoaz n'eus aet barner ebet.
Barner ? Er-méz, er-méz eme Ber,
Ha prim, ha diwar herr !
— Er-méz ! er-méz ? Me mont er-méz ?
Me Erwan ar wirionez !
Petra ! Petra !
Da bep hini e dra !
Ya da bep hini,

Ha d'in-me ivez Erwan Helouri.
Labouret am eus da c'houinit an Neñv.
Hen gounezet am eus kenkoulz ha te.
Amañ emañ ; amañ e chomin,
Nemet urcher a gasfes d'in,
Goude prosez,
D'am c'has er-méz.
— Prosez a vo hag urcher goude,
Eme Ber.
Elez, klaskit d'in an den-se
Hep koll amzer.

An elez a nijas, a c'hournijas,
A furchas, a zifurchas
Eus an nec'h d'an traoñ
Dindan pep skabell ha pep skaon,
Met e neblec'h ebet
Nag urcher
Nag archer
Ne voe kavet.

Kement a drouz, a cholori,
A voe neuze
Wardro Erwan Helouri,
Ma teuas an Aotrou Doue,
Hag e Vamm ive,
Betek lost an ti.
Ha pa glevjont ar gont
Leiz o c'hàlon e c'hoarzjont.

— An den-mañ, Per baour,
Eo hor brasa mignon.
N'en doa nag arc'hant nag aour
Met karantez wirion
Evit paour ha paourez.
E dron ervat 'zo em falez.

Laouenanig Breiz.

III. - KENSTRIVADEG AR C'HAN EVIT BUGALE SKOL

An holl vugale a gano diou ganaouenn :

1° Hed ar yeodi.

2° Eur ganaouenn all a zibabint evel ma karint. Ar gwella kaner hag ar wella kanerez a gano war ar c'hoariva, goude lein, dirak an holl.

Hed ar Yeodi

Ton : *A-hed an noz.*

Amañ e troñ ar bajenn.

Me 'zo ganet e Bro-Dreger,	Eur goulmig wenn am eus kavet,
Hed ar Yeodi !	Hed ar Yeodi !
En eur gerig sioul ha seder,	Eun ti bihan am eus savet,
Hed ar Yeodi !	Hed ar Yeodi !
Eus Menez-Bre da Bouldouran,	Er c'hoad e kan evnedigou,
Eus Kervarzin da Blouvouskan,	Laouen eo ar yaouankizou,
Me 'gerz war roudou sant Erwan,	Koant meurbet ar merc'hedigou,
Hed ar Yeodi !	Hed ar Yeodi !
Pa vez deut an nevez-amzer,	Ma teu an ankou didruez
Hed ar Yeodi !	Hed ar Yeodi !
Ha pa led an hañv e splannder,	Da c'houlouen ouzin va buhez,
Hed ar Yeodi !	Hed ar Yeodi !
Pegen kaer glazur ha bleuniou,	Ha ma ven gantañ diskaret,
Pegen brao balan ar c'hleuziou,	Me 'fell d'in beza douaret,
Pegen sklaer dour ar feunteuniou,	Er vroig am eus ken karat,
Hed ar Yeodi !	Hed ar Yeodi !

Ar Yeodi eo ster Lanndreger.
Hanvet eo e galleg : Le Jaudy.

Kastell-Aodren, 18-11-51.
Evnnig Penn-ar-C'hoad.

Gorrek

Mor a zudi eo prederia A-hed an noz, Din dan bolz an
neñv o sklaeria A-hed an noz ! Tra sterc-den- no' us d'hor penn
Pedomp holl a galon laouen, distan ha ner-zuz ar be-denn
A-hed an noz !

IV. - KENSTRIVADEG AR PREZEGEREZ (CONCOURS D'ELOQUENCE)

Evit ar baotred hag ar plac'hed yaouank eus 17 da 25 bloaz. Bez e vo roet daou briz kenta kaer (diou statu eus sant Erwan), unan evit ar merc'hed, eun all evit ar baotred.

Testenn : Diskouezit e Sant Erwan abostol pobl ar vro : Dilizet en deus an enoriou ha labour lezvarn an eskopti evit distrei d'e labour a berson parrez, prezeg e brezoneg ha soursial euz paourentez an dud.

Evit anaout buhez sant Erwan, prenit al levr : « *Monsieur Saint Yves* » gant an aotrou beleg Louis Mahe. E gwerz e ti « Moreau, libraire, Tréguier, Côtes-du-Nord ».

V. - KENSTRIVADEG AL LAZOU-KANA (CONCOURS DE CHORALES)

REOLENN

1. — Kenstrivadeg al lazou-kana, e Landreger, en devo pevar derez : a) 4 mouez disheñvel (catégorie A pour grandes chorales) ; — b) 4 mouez disheñvel (catégorie B pour chorales moyennes) ; — c) 3 mouez diheñvel ; — d) 3 mouez kompez.
2. — Ar re a gano e diou vouez hepken a vo laket e kevrenn ar ganderien bobl.
3. — Eul laz-kana n'hellou kenstriva nemet en eun derez hepken.
4. — Pep laz-kana a die rei, d'an nebeuta, diou ganaouenn : unan eus ar c'hanaouennoù ret, hag eur ganaouenn lib.
5. — An holl ganaouennoù a die beza e brezoneg.

KANAOUENNOU RET

A) — 4 mouez disheñvel evit lazou-kana bras (catégorie A) : *Pedenn da Zant-Erwan*. Ton ha kensonerez gant an Ao. *Goasdoue*.

B) — 4 mouez disheñvel evit al lazou-kana bihanoc'h (catégorie B) : *Kerz en hent Morvan*. Komzou gant *Paotr Treoure*, kensonerez gant an Ao. *Goasdoue*.

C) — 3 mouez disheñvel : *Kantik Sant Herve*. Kensonerez gant an Ao. *F. Humbert*.

D) — 3 mouez kompez : *Maro ar C'hi Rouz*. Kensonerez gant *G. Pondaven*. Komzou gant *Paotr Treoure*.

TAOLIT EVEZ

Ouspenn ar c'hanaouennoù-se, an holl lazou-kana o devo da zeski, evit beza kanet gant an holl asambles :

Dalc'h sonj ; kendoniet gant an Ao. *Goasdoue*.

Evit kaout an holl ganaouennoù : Skriva da V. Seite, Bleun-Brug, Treboul Finistère (eur skoued ar follenn, mizou kas ouspenn).

VI. - KENSTRIVADEG AR C'HANAOUENNOU

(EVIT AN NEB A GARO)

Bez' e vo gellet kana n'eus forz peseurt kanaouenn. Met ar c'hanaouennou gwella eo ar re n'int ket bet moulet c'hoaz.

VII. - KENSTRIVADEG AR RIMADELLOU

(CONCOURS DE MONOLOGUES)

Bez' e vo gellet displega n'eus forz peseurt rimadell gant ma ne vo ket re hir. Klask dreist-holl rimadelloù nebeut anavezet pe nevez savet. Ar re wella ma n'int ket bet moulet c'hoaz, a vo embannet e « *Bleun-Brug* ».

VIII. - KENSTRIVADEG AN TRESEREZ

(CONCOURS DE DESSINS)

Ijinit eur skeudenn livet, a vo warni tra pe dra eus buhez sant Erwan. Ment ar paper a dle beza : 27×21.

Kas al labouriou, arak ar 15 a viz Gouere da : M. Savina, Bleun-Brug, Tréguier, C.-d.-N. Lakaat an ano hag an oad war gein ar skeudenn. Ar re genta a vo diskouezet e-pad ar gouel.

JAKEZ-ERWAN AN TOUMELIN OC'H OBER TRO AR BED. — Mont dre ar bed evit ar blijadur da veaji a zo bet a viskoaz eun doug eus ene ar Vretoned. Soñj hoc'h eus marteze eus *Alan Gerbault* a reas tro ar bed war eur vag vihan e-unan-penn. War e lerc'h eur Breton all, *Bernicot*, a reas kement all. Bremañ eo an *Toumelin* a zo aet war-raok, eur Breton hen ivez leun a galon hag a bennegez. Dek metr hepken d'e vag, eun netra war ar mor divent, met eun ano dezi : ar *C'Hurun*, eun ano brezoneg. Kuitaet en deus ar Groazig, e kichen Naoned, hag e soñj a zo lakaat tri bloavezh d'ober e dro. Beaj vat d'ezañ !

KANVOU. — Dont a ra d'eomp kelou glac'harus maro an Ao. William Smith an Amerikan madeleus eus an U.S.A. en deus meur a wech roet skoazell d'hon oberou breizek : skol vrezonek dre lizer, Bleun-Brug, mouladurioù hag all...

Anavezet mat e oa gant meur a hini eus hor mignoned, rak bet eo e Breiz meur a-wech hag anaout mat a rae ar brezoneg a skrive peurvat. Al liziri am eus bet digant alies a zo skrivet en eur brezoneg ken flour m'eo eun dudi o lenn. Er miz a zeu e tist'roimp war al liziri-se hag oberou brezoneg an Ao. Smith, Plijet gant Doue ha sent Breiz e zigoll evit e vadelez.

GANEDIGEZHIOU. — Dont a ra d'eomp ar c'heleier laouen-mañ : Hor mignon mat, an Ao. Yann Bouessel Dubourg en deus bet eur Verc'hig. Anvet eo bet *Anna*.

Tangi, Malo ha Lena Al Louarn a gemenn d'eomp o deus bet eur c'hoar vihan anvet *Notwenn*.

Buhez hir d'an diou Verc'hig hag eürusted d'o c'herent.

KORN AL LIZIRI

BREZONEG EN TIEGEZ

GANT evez ha dudi eo em eus lennet pennad Y. M. « *Galleg awalc'h a ouezint atao* » war niverenn ziweza « *Bleun-Brug* ».

Evidomp-ni, brogarourien, o veza m'eo deut hor buhez pemdeziek da veza ar stourm diehan evit difenn ar Brezoneg e komprenomp ervat pegen mantret e c'hell beza eur Breizad gredus o welout froud diroll ar galleg o klask mouga hor yez en hor bro.

Siouaz ! n'eo ket gant klemmou e vo saveteet hor Brezoneg ; gant eul labour aozet mat, ne lavaren ket !

Setu perak eo bet savet gant eun toullad Brogarourien « *Emgleo an Tiegeziou* » a zo e bal d'erc'hel beo ha ledanaat ar sevenadur breizek ha keltiek dre zlabarzh an tiegeziou.

Tiegeziou nevez a zo o sevel, bihan an niver anezo c'hoaz, hogen entanet kalon ar gerent gant ar garantez-vro, hag int o sevel o bugale e Brezoneg : Eur Brezoneg yac'h ha pinvidik hag a vo deiz pe zeli eur befiveg studi en hor skolioù.

Pinvidikaat ar yez c'hoaz ; brasaat niver an tiegeziou brezonek, startaat an emgleo, ar c'henskoazell etrezo, ledanaat anaoudegez ar yezou keltiek ; setu pallou kenta « *Emgleo an Tiegeziou* ».

Ret eo da hep hini gouzout : Pe e vo adsavet Breiz gant ar Brezoneg pe ne vo mui a Vreiz. Ne dalvezo hor strivou da netra ma varv hor yez.

Tadou ha mammoù Breiz, « en hor yaouankiz eo bet fiziet gant Doue amzer da zont hor Bro », a lavare hon tad mat, Yann-Vari Perrot. Hor bugale a zo bet fiziet ennomp gant Doue. Kiriek e vimp dirazañ eus beza lazet ene hor gotienn ma lazomp ar Brezoneg war vuzelloù hor re vihan.

A. ol L.

— Ci-joint 500 frs pour mon abonnement à « *Bleun-Brug* » dont j'admire l'action.
R. H. (S.-et-O.)

— Lavarout a ran d'eoc'h pegen plijus em eus kavet an niverenn ziweza e brezoneg. Pennad an Ao. Favé paj. 2 ha 3 am eus kavet dispar pouezus evit an difenn. Beaj M. Glanndour ive. Hini Morvan ken entamet ! « *Ankou miz Du* » : dudiuz. Soñj ar maro a dle kacout eul lec'h divent e speredelez ar Breizad kristen soñj ken efedus, evit renerez ar vuhez.

Y. T.

— Veuillez envoyer « *Bleun-Brug* » au R. P. F.-M. Drèves. C'est un brave prêtre breton qui a quitté la Bretagne il y a 50 ans (emañ o chom e Bro-Zaoz), mais qui reste fidèlement attaché à notre pays et qui a pleuré d'émotion le mois dernier, quand des religieuses bretonnes, venues le voir, ont chanté avec lui, le chant de Sainte-Anne et d'autres chants bretons.

J. M.

— Gant plijadur e resevan ar gelaouenn bremañ, rak bez' ez eus anezi, hiviziken, eur gelaouenn vreiziek. Aner e vefe d'in klask rei meuleudi ouspenn. Kudenn ar vroadelezh hag he finvidigeziou a zo displeget gant ampartiz ha sklêrder gant an Ao. Fave...

— Fromet oun bet o lenn lizer Y. M. « *galleg a-walc'h a ouezint atao* » ! Deut eo ar soñj d'in, ouz e lenn, eus va zud koz ma tlean d'ezo gozout ha karout ar brezoneg, ha dre-se karout va bro.

— Ha ne vefe ket unan eus pennou-labour ar « *Bleun-Brug* » klask, dre e levezon, lakaat eun tammig brezoneg e kelaouennou a zo evel ar c'h « *Courrier du Finistère* » ?

L. B.

— Niverenn vrezonek ziweza « *Bleun-Brug* » a zo dreist. Va gwella gourc'hemennou.

P. M.

DRE VREIZ HA DRE AR BED

ABADENNOU BLEUN-BRUG. — Abadennoù, gant filmoù ha kaozeadennoù diwar-benn ar Bleun-Brug hon eus roet e Landreger hag e Plougerne. Kemend all a raimp dizale e Pont-e-Kroaz hag e Baod. M'hon defe amzer e karfemp mont d'ar parrezioù all. Aze emañ, a gredomp, an doare gwella d'ober abostolerez breizek. E Plougerne, da skouer, hon eus bet tro da werza eun toullad niverennoù Bleun-Brug.

SKOAZELLIT AC'HANOMP. — Deuet ez eus d'eomp pennadoù plijus da embann, digant meur a hini, dreist-holl digant Y. Troal, Kerlann, Botorel, an Amiral Laurent, Milik ar Skañv, R. ar Masson, J. Konan, K. Riou, J. Seité, F.-C. Chevalier, H. Caouissin, F. Ropars, G. Coadou, S. ar Gô, Yeun ar Gô...

Bihan eo hor c'helaouenn setu ma ranko darn pasianti eun tammig. Da c'hortoz, bennoz Douz d'ezo. Er pezh a vank d'eomp eo pennadoù beo diwar-benn an amzer vremañ. Ac'hanta ! piou a skrive ?

WAR AN DAOLENN A ENOR. — E-touez ar re o deus kavet d'eomp ar muia lennerien nevez pe o deus kemeret poan da werza « Bleun-Brug » hon eus ar blijadur da venegi : Kor. Riou, Landudec ; an D^r Philippe, Treboul ; A. al Louarn, Paris ; an Ao. Y. Troal, Landl. Gant ugent den evel ar remañ, hon defe araok eur miz amañ 2000 lenner evit « Bleun-Brug ».

GOUEL SANT KORANTIN. — Ar gouel-mañ (12 a viz Kerzu) a zigas d'eomp da soñj bep bloaz eus maro an Aotrou Perrot. Bretoned Paris o deus bet eun oferen evit. Niverus int bet diredet da bedl evit diazezoù ar Bleun-Brug hag abostol « Feiz ha Breiz ».

An Tad Cabon en deus graet meuleudi an Ao. Perrot e brezoneg, hag an Tad Char-dronnet, e galleg. Peur e welimp kemend-all e Breiz ?

- « Aotrou Perrot karet, koulskît dimec'h e peoc'h
- « E skeud chapel koatkeo ken kaer savet ganeoc'h.
- « Breiziz, war ho roudou, a-vagad a gerzo.
- « Ho pûhez, ho maro, bepred o c'hennerso. »

V. S.

PREZEGENNOU. — Prezegennou a zo bet graet e Kemper dindan paeroniezh « Kendalc'h ha kevredigez an darempredoù etrekeltiek » gant an Ao. Chaloni Batany, diwarbenn ar brezoneg hag e lennegezh, hag gant an Ao. Mocaer, diwarbenn Iwerzon. Evit kaout prezegennerien war an danvezioù breizek n'eus nemet skriva d'ear Bleun-Brug.

KIMIAD. — Gant keuz bras eo e welomp hor mignon ha kenlabourer mat J. Konan eus Perroz o vont pell diouzomp. Kuitaat a rank siouaz ! e Vreiz gant e diegezh a-bez. Fiziens hon eus e c'hello, e Montreal, er C'honada, kendalc'h da genlabourat ganeomp. Prometet en deus e savo du-hont eur strollad Bleun-Brugerien. Beaj vat ha c'hañs vat d'it. Mignon kaer, war zouar « Jacques Cartier ». Siouaz ! avat, ne gle-vimp mui da viniou ellet ken brao gant bombardou da vugale, en hor Bleun-Brugou.

C'HOARIVA. — An Ao. Lohier en deus lieskrivet ar brezegenn gaer en deus bet graet e Bleun-Brug Keranna, war c'hoariva an Ao. ar Bayon. Evit he c'haout, skriva d'ezañ : 78, rue Nationale, Pontivy (Morbihan). Priz : 100 lur.

KAZETENNOU NEVEZ

Dont a ra d'eomp eun nebeudig' zo, diou gazetenn nevez.

1° « La Terre Bretonne » renet gant an Aotrou beleg Gautier, a labour kement evit ar Vretoned divroet. Rei a ra ar journal-mañ keleier niverus eus Breiz d'ar Vre-toned divroet. Ouspenn, kaout a reer ennañ pennadoù gallek plijus diwarbenn Breiz. Rei a ra ivez eur skrid e brezoneg e pep niverenn.

M'oc'h eus Bretoned divroet en ho familh, setu eur c'halanna brao da ginnig d'ezo. Koumanant bloaz 250 lur : « La Terre Bretonne » 44, rue des Volontaires, Paris (XV^e). C.C.P. 8.301-85 Paris.

2° « Ar Glazig », eur journal bihan, e brezoneg hag e galleg, moulet gant « Le Petit Bleu », journal an Ao. Pleven, eus ar c'h « Côtes-du-Nord ». An holl vrezonegerien a skoazello ar journal-se en eur goumananti d'ezañ lennerien niverus. Koum. bloaz 80 lur. C.C.P. 965.27 Rennes.

COURRIER - PROGRÈS. — Eun nebeudig' zo e teu d'eomp ive eur journal ha n'eo ket nevez, met kentoc'h gwisket nevez : « Le Courrier du Finistère » ha « Le Progrès de Cornouaille » an hini eo. Plijusoc'h eo, e gwirionez, evel m'emañ. Meuleudi d'ar re a zo e penn. Meuleudi dreist-holl d'ar pennadoù a zo enno eun tamm spered breizek ar pezh a ro d'ar journal eur vuhez ha n'o deus ket ar journalioù all a lennomp. Perak, avat, ne vefe ket da heul eur pennadig hennak e brezoneg ?

KANT LUR AR BREZONEG. — D'ar galv hon eus graet da vadelez hon lenne-rien, en niverenn vrezonek diweza, evit dont war hor sikour dre ziouret eur bilhed bennak, hon eus bet eur respont, unan hepen :

An Ao. Jannin : 100 lur evit ar brezoneg.

Digor e chom ar roll. Piou a vo an eil ano ?

Adiavarout a ran : milurioù ha milurioù a roit evit ma vevo ar galleg... ha petra roit evit ar Brezoneg ho yez ?

V. Seité, Bleun-Brug, Treboul (Finistère). C.C.P. Nantes 544-22.

KANADEG E BREST. — Lazou-kana eskopti Kemper a zo bet en em vodet, e Brest, d'an 18 a viz Du evit eun abaden-gana. Ar blijadur hon eus bet da glevout brezoneg gant meur a laz-kana. Ar bras zoken eus ar c'hanaouennoù, a oa ganto tonioù breizek. Ne gredan ket e c'hellfe eur gwir laz-kana e Breiz, tremen hep tenna talvou-degez eus hon teñzor dibar a sonerezh. Aze, hag aze dreist-holl eo emañ gwir dachenn hon lazou-kana. Plijet eo bet d'eomp, ad-klevout eno ivez, kanaouennoù ar Bleun-Brug. Ac'hanta, Lesneven St-Vaze ha Landl, dont a rae ganeoc'h, avat ! Meuleudi d'eooc'h !

Perak avat, beza mesket gant traou kaer, diotachou roet gant maskaradennoù ha n'edo ket o flas eno en delz-se

KERMES LANDEVENNEG. — « Bleun-Brug Paris » en deus bet graet e-kreiz ar gêr-vras, eur c'hermess evit adsevel abati Landevenneg, d'ar 24 ha d'ar 25 a viz Du diweza. Eun taol kaer eo bet ar c'hermess-se. Kalz tud a zo bet war e dro. Fiziens hon eus da veza roet eur maen a zoare da sikour sevel an abati nevez a vezo e Breiz eun tour-tan skedus. Fiziens hon eus da c'hellout ober gwelloc'h c'hoaz er wech a zeu.

War « Pax » kelaouenn Manati Kerbeneat, e lennomp e vo eur c'hermess bras d'an 28 a viz Ebrel, e Landevenneg. Eun nevezenti eo da veza notet. — Pax : Koum. bloaz 175 lur. C.C.P. 1145-34 Rennes. II. Gougay, Abbaye de Kerbénéat, Plouneventer (Finist.).

BRETONED 'ZO NE GOUSKONT KET. — Estreget skañv-henni ha pismigat a ra Bretoned zo. Ar strollad nevez lakel war-ze, evit unani ar Vretoned ha difenn madou Breiz, a zo ennañ tud eus ar seurt-se. D'an 22 a viz Du, o deus bet en em vodet, e Paris, evit studia kudennoù a sell ouz ar brezoneg, ar c'hoariva, ar sinema, ar radio, an arzoù-kaer... Warlerc'h ar vodadenn ez eus bet kaset kannadeg da c'houlenn groñs, digant ministr an deskadurezh, embann al lezenn war ar skol vrezonek bet votet er Gambr. Prestig goude e teu al lezenn er-maez. Mat eo gourdrouz ha hopal awechou : Lennit « La Vie Bretonne », Bulletin des intérêts bretons, mensuel. Abonnement : 200 francs. M. R. Declercq, Quimerc'h (Finist.). C.C.P. Rennes 741-54.

BODADEGOU C'HOAZ. — Kuzul-meur ar Bleun-Brug a zo bet en em vodet e Kemper d'an 29 ha d'an 30 a viz Kerzu. Eun nebeut mignoned eus Kemper a zo bet pbe ivez da gemer perz er vodadenn-se. Labour vat a zo bet graet.

D'ar sul 12 a viz Genver ez eus bet eur vodadenn all e Baod (Morbihan), dindan renadur an Aotrou Meur Baron, Vikel-Vras Gwened : eur vodadenn talvoudus-tre evit amzer da zont Bleun-Brug Gwened. Meuleudi bras da Wenediz ! O labour a vo eur skouer dispar evit an eskoptioù all a Vreiz.

EUN ABADENN-STUDI E BREST. — Eun abaden-studi, war hor c'hontadennoù, hon dansoù hag hor sonerezh, a vo graet e Brest d'an 23 ha 24 a viz C'houevrer evit hor yaouankizoù (merc'hed ha gwazed) mistri ha mestrezed-skol hag ar re all a garfe dont. Evit gouzout hiroc'h, skriva da : V. Seité, Bleun-Brug, Treboul.

AR GALLEG O VONT WAR SOUZ DRE AR BED. — Pez a lavaran amañ ned eo nemet ar pezh am eus lennet war ar c'hazetennoù gall er miz-mañ. N'it ket eta da damall d'in ijina traou divirioù. N'eus ket da dortal, ar galleg a ya war gil. E-touez tud an O.N.U. n'eus ket ouspenn 15 dre 100 a gement a gomprenfe ar galleg. An holl avat a oar ar saoneg. Gwechall, er Société des Nations e Jenev (soñj hoc'h eus), e oa tost d'an hanter eus an dud a oule galleg.


AN DUD ALKOOLEK E BRO C'HALL. — Niver an dud alkoolek-groñs a yar war gresk e Bro C'hall. Epad ar brezel e oa bet gwellaet yec'hed an dud dre ne gavent ken da eva (C'hwil' oar eo an Alamaned a lonke tout). Met bremañ, va Doue. Tud kollet o fenn gant an alkoool, tud foll da stagañ, a zo a villeroù kement n'eus ken plas awalc'h ken d'o loja. Hervez an dud a sav niveradurioù (statistiques) ez eus eun den war daou ugent a vefe alkoolek-poz. Petra neuze eus niver ar re a grog hepen da boaza ?

Lavarout a reer eo Bro-C'hall eur vro binvidik. Marteze eo gwir. Met ar C'hallaoued n'int ket pinvidik. P'o deus daou wenneg e kasont anezo d'ar Bistrot. Daoust ha n'eo ket ar Bistrot roue Bro-C'hall ?... ha roue Breiz ?...

Le Gérant : Abbé BLEUVEN, Curé de Saint-Renan. — Tirage : 1.400 exemplaires.

QUIMPER IMP. CORNOUAILLAISE





Iliz-Veur Landreger.

Cliché Olote

Nann n'eus ket e Breiz, eun iliz ken kaer
Hag e iliz-veur, e kêr Landreger.

Evit Sant Tual, hon Tad benniget,
Dre urz sant Erwan ez eo bet savet.

Deomp 'ta, Kristenien, betek Landreger
Ha ne gollimp ket, sur mat hon amzer...

(Supplément au N° 45 de " Bleun-Brug "

KELC'HLIZER BLEUN-BRUG 1952

Abaoe e adsavidigez e 1948, ar Bleun-Brug n'en deus graet nemet kreski e vrud. Hon daou c'houel diwoza, dreist-holl, o deus douget kalz freuez.

Er bloaz-mañ ar Bleun-Brug bras a vo graet e Landreger d'an 1 - 2 ha 3 a viz eost, en enor da Sant Erwan, paeron ar Vretoned. Bez'e vo, e-doug ar gouel, abadennoù-studi war Sant-Erwan, ar Vretoned divroet ha war labourioù an c'berou breizek. Ouspenn an ofisoù santel hag ar prosesionou, bez'e vezo c'heaz, peziou-c'hoari e brezoneg, sinema, senerez, kan ha korell.

Kuzul-komun Landreger, ha kuzul-Meur ar "C'hôtes du Nord " a re skoazell d'eomp. an Ao. René PLEVEN en deus asantet heza prezidant ar c'homite a enor.

E-kichen ar Bleun-Brug bras, hon eus savet tri bleun-brug bihan a vo graet eur miz d'an nebeuta araok egile :

D'an 18 a viz Mae, Bleun-Brug Kerne , e Pont-e-Kreaz, en enor da bempred kantved Itron Varia Roscudon .

D'an 2 a viz even, Bleun-brug Léon, e Plouguerneux, en enor d'ar misioner bras Dom Mikael an Nöbletz.

D'ar 6 a viz Gouere, Bleun-Brug Gwened e Baed, Morbihan, en enor da Itron Varia ar Sklerder.

Ar gouelioù bihan-se, o veza tostoc'h d'ar bôbl, a roio tro da galz muioc'h a dud da labourat war ar brezoneg. Ober a raint eun dibad, etouez ar vugale dreist holl, ha siksur a raint paea o beaj , d'ar re wella, da vont da Landreger.

Met ar gouelioù-se, n'o deus nemeur a dalvoudregez, nemet ha beza e vefent ar freuez eus eur bloaveziad labour gant ar c'hoant d'ober gwellec'h c'heaz en amzer da zont . Pep hini a dle labourat da strewi hor menozioù en-dre d'ezañ.

Hor sekretour V. Seité hag izili ar c'huzul Meur a yelo, mar gellont betek ennoc'h. Klask a raimp rei " abadennoù Bleun-Brug " gant filmoù eus her gouelioù, diskou brezogeg, hag eur gaozeadenn da lavaret piau epp. Abadennoù evel-se a zo bet roet dija e Landreger, Plougerne, Pont-e-Kreaz ha Baed.

An arc'hant dastumet evel-se a c'hellou semijout da baea beaj Landreger d'al lazou-kana pe d'ar c'hellou keltiek eus ar c'horn-bro.

Bleun-Brug Paris, en deus nevez savet eur c'hermess evit abati Landevenneg ha zo bet aet an hegleo anezañ da bell, dre ar c'hazetennou hag ar radio.

Bleun-Brug Breiz, a zo krog, d'ar mare-mañ, dindan renadur Bernard de Paredes, da sevel eun diskouezadeg war istor manati Landevenneg a-dreuz kant vedou istor Breiz. Prest e vezo an diskouezadeg-se, e Landevenneg-memes, a-benn fin mez Ebrel

Ouspenn, d'ar sadorn 23 ha d'ar sul 24 a viz c'houevrer, e Brest, e vo ganeomp eun abaden-studi war draon Breiz, evit ar yaouankizou. Studia à vo graet dreist-holl, ar marvailjou koz, ar sonerezh vreizek hag ar c'horolloù. Ho pet ar vadelez da vruda an abaden-se, ha da zigas d'eomp e-leiz a dud. Evit gouzout hiroc'h, skrivit d'ar Sekretour Bleun-Brug, Trehoul (Finistère)

Er bloaz diweza hon eus bet moulet teir niverenn eus "Bleun-Brug" e galleg. Er bloaz-mañ, avat, hon holl niverennoù a vo e brezoneg. Hon holl izili a dle koumananti d'hor c'helaouenn, ha klask d'eomp lennerien niverus. Koumanant bloaz : 500 lur koumanant a enor : 600 lur C.C.P. NANTES 544-22 V. Seité
Bleun-Brug TREBOUL (Finistère)

Skodennoù ar Bleun-Brug a zo da veza paet d'an hevelep kont-red :

Skoazeller	:	200	lur
Ezel	:	500	"
Madoberour	:	1000	"

Gant an diou skodenn ziweza e vo gallet mont evit metra da deir c'hoaradeg en unan pe unan eus gouelioù ar Bleun-Brug : c'hoariva, heihladeg, koroll ha kan.

Evel a welit, mont a ra ar Bleun-Brug war - raok. Sonjit, avat, hon eus dispignou bras, ha gwelloc'h a rafemp m'hon defe muioc'h a arc'hant. Bezit eta ar vadelez da baea d'eomp rektal, ho skodenn 1952. Kerkent e kasimp d'eoc'h ho kartenn nevez. Klaskit d'eomp, ouspenn, izili endro d'eoc'h.

En araok e lavaromp d'eoc'h " Bernoz Doue "

Ar Penn-rener

Gab. ar Moal.